


bremañ



KOUERIEN BREIZH E FULOR



Gwengolo 1990 - Niv.108 - 15 lur



N'ankouomp ket stourm Kebekiz

Abaoe tost ur bloavezh penn-da-benn bremañ ez eus kaoz gant an dud eus broioù ar reter o deus adkavet o frankiz. Komzet e vez diwar-benn Bro-Alamagn, ar broioù balt, ha nevezig zo ivez, diwar Bro-Albania hag he annezidi ael-kuit sa kannalioù Tirana da gavout gwasked enno. N'eus netra plijusoc'h da welet, war ma meno, eget broioù och ober anaoudegezh gant ar werinelezh, daoust ma n'ouzter ket mat penaos e troio an traoù ganto en diwezh. Met e-pad m'emañ rod an istor o troññ buanoc'h-buanañ ar broioù-se, e c'hoevez en tu all da meuror atlantel traoù dedennus-kenañ a vefe ur vezh deomp mont e-biù dezho. Da skwer gant ur vro plijus ha kalonek, Bro-Gebek.

Tud eus an diavaez a ra eus Bro-Gebek "Une belle province" dres evel ma reont eus Breizh "une belle région". Neozh, pell 'zo emañ padred "frans nevez" o stourm evit o yezh, o sevenadur hag o frankiz. Kudennoù dazont ar vro-se a seblant din bezañ kalz tostoc'h ouzh hon-re-ni eget kudennoù-dazont Bro-Balestlin da skwer ! Ha koulskoude ma na fazian ket, n'eus ket bet anv ebet betek-hen eus stourm ar Ganadianed c'hall er C'hazetennoù brezhonek. Hag-eh e vefe abalamour d'ar yezh a vez komzet duhont ? Gwir eo ez eo amañ marteze un dalc'h evit tud 'zo. Penaos stourm evit ar brezhoneg amañ da laret eo a-enep ar galleg memestra) ha kemer perzh duhont barzh ur stourm all-a-du gant ar yezh a voug hon heni ? Fiziañs 'm eus n'eus ket kalz a vretoned o welet an traoù en un doare ken strizh. Met ret eo anzav n'eo ket bet klevet kalz a drouz o sevel gant ar vretoned. Neozh pegen tost eo an div yezh-se an eil ouzh eben, ha pa na vefe nemet e-keñver o istor. Gouzavit o deus o-div dindan gwesk ur yezh all ha stourm a reont a-gwesk o flanedenn gant holl nerzh ar yezhoù ne fell ket dezho mervel. Setu perak n'eo ket deraet deomp chom diseblant ha dilavar dirak ur vro o c'houmte he dizalc'h ha pa vefe ar galleg he yezh. Ouzhpenn-se e vefe tu deomp deskin traouigoù o sellout piscoch ouzh istor ha planedenn ar galleg en Amerika-an-Hanternoz. Bez ez eus duhont div vro, Bro-Louiziana ha Bro-Gebek, ar galleg o yezh, a ziskouez deomp petra a c'hellio degouezhout d'ar brezhoneg ha da bobl Breizh.

An heni gentañ a ziskouez deomp petra e teu da vezañ ur sevenadur pa n'o deus ket an dud nerzh ha kalon a-walc'h d'eo virotout da vevrel. An eil ar c'houmte a ro deomp skwer ur bobl o trec'hñ war taolioù fall he enebourien. Plijout a rafe din ez afe ar maout gant ar brezhoneg e Breizh evel ma c'ha ar maout gant ar galleg e Bro-Gebek. Met daoust hag eñ n'emañ ket ar brezhoneg en arvar da gemer hent galleg Bro-Louiziana ? Gwelet 'vo. Evit ar mare e chom ar brezhoneg stre daou, met tost a-walc'h d'an islonk memestra. Da echuñ tre gant ar gaoc, c'hoant 'm befe heliñ chañs vat ha kalon da gallegerien Bro-Gebek peogwir e stourmont eveldeomp-ni evit ma chomo bev o yezh ha frank o vro. Ha gant ma vo komzet ha skrivet muioch-mui (e brezhoneg) diwar ar stourm-se ivez, kenavo deoc'h holl.

An niv. 106/107 eo an niverenn dedennusañ bet lennet ganin abaoe m'on kourmanant.

Kalon deoc'h, V. an D. (Lannuon)



Ur gelaouenn sizhuniek evit Breizh

Goude bezañ savet un doser war darvoudoù Plogoñv, e oa bet paouezet gant ar gelaouenn "Le Canard de Nantes à Brest", evit abegoù arc'hant, war a seblant. Ar wech kentañ e oa d'ur gazetenn klask skignañ keleier diwar-benn Breizh e galleg, distaget diouzh ar c'helaouennoù parizian (daoust ma oa heñvel un tammig diouzh patrom "Liberation"). Kinnig a rae keleier a-bep seurt diwar-benn buhez Breizh, met ivez keleier etrevroadel. Ne oa ket ur gazetenn rannvroel enta !

Ur gazetenn Breizhat e oa, savet gant Breizh hag o komz diwar-benn darvoudoù Breizh. Disheñvel-mik diouzh West-Frañs enta. Re untiek e oa a-wechoù er bloavezhioù dek-ha-tri-ugent e oa pouez gant an "ideologiezhioù". Met tamm ha tamm eo bet difeñset e vragoù da Yann, evel ma vez lavaret tro-dro Montroulez : gant an amzer o tremen e vije bet gwellaet, a-dra-sur.

Setu ar pezh a ra diouer e Breizh hiriv an deiz e gwirionez ! Ur gazetenn hag a vefe gouest da gomz diwar-benn an darvoudoù o c'hoarvezout en hor bro ! O tiskouez d'ar Vretoned ez eo pinvidik-mor ar vuhez dre amañ... e pep korr eus ar vro ! O tiskouez dezho e c'heller sevel ur gelaouenn pe ur vagazinenn dibar amañ, hep tremen dre Bariz ! Gant ur santerezh breizhat e vefe savet, pell diouzh meizelouriezh orbidek kêrbenn Bro-C'hall. Daoust hag ez eus tu da sevel seurt kelaouenn amañ ? Poent eo boulec'h gant al labour, a gav din, gant an Europ o tiwanañ (e Bro-Skos e vez embannet kent kelaouenn skosat...).

Un doare all ivez 'da stourm ouzh diktator dail Pariz !!!

Jakez-Erwan MOUTON, Redon

Paskal Tabuteau (Metz)

- N'ankouomp ket stourm gallegerien Kebek, na kennebeut hini an Indianed gwasket e Kebek. Gant an eil re hag an re all hon eus da zeskiñ. Plijet e vimp och embann ar pennadoù a resevimp diwar o fenn.

Kelenn brezhoneg

Lennet m'eus pennad Paskal ar Marcheg diwar-benn "Kelenn brezhoneg d'an dud deuet" gant evizh.

Skrivañ a ra emañ ar c'helenn-se "o tiwan" : petra a vez graet neuze e skolioù-noz hag en devezhoù-studi (e KEAV da skwer, abaoe 40 vloaz ?)

Skrivañ a ra "neus nemet un den gopret evit soursial ouzh stummadur ar re vras". Daoust hag e talv da larout ne vez ket gant o labour gant ar gelennerien all ?

Mark KERRAIN, Roazhon.

Kentelioù brezhoneg e Brest

Kentelioù noz a zo e Brest, aozet gant ar gevredigezh kanevedenn, ha kregiñ a raint sizhunvezh kentañ miz Here. Tri live zo : deraouidi, d'ar Yaou da 6 eur 30, eil bloavezh, d'al Lun da 6 eur 30, ha trede bloavezh, d'ar Meurzh da 6 eur 30 ivez. Titouroù a c'heller kaout digant Ti an Holl an Harteloire, ball Clemenceau e Brest, pe, dre bellgomz, digant Y.F. KERNEIS en niverenn 98 05 21 17, pe digant I. KADORED en niverenn 98 28 10 37.

PENNAD-KAOZ GANT GUILLAUME ROUE PREZIDANT FDSEA PENN AR BED

Guillaume Roue en deus asantet respont evit Bremañ, hag e brezhoneg, ouzh goulennoù hor c'henlabourer Fulup Oïllo.

En niverennoù a zeu, e vo kinniget deoc'h pennadoù kaoz gant pennoù bras sindikadoù labourerien douar all.

Guillaume Roue a zo meur a gasketenn war e benn : Prezidant FDSEA Penn ar Bed, Sekretour-Meur Kambr al Labour-Douar Penn ar Bed, Prezidant Bodad an Endro e Kambr al Labour-Douar Penn ar Bed, Prezidant Kuzul Breizh ar Saverien Voc'h (Comité Régional Porcin), ha Sekretour ar FNP (Fédération Nationale Porcine).

Evit e vicher, emañ e penn ur strollad produerien voc'h, anvet PRESTOR, ar sez anezhañ e Dirinnon (e Kersent-Plabenneg a-benn nebeut). Ganet eo GRESTOR diwar kendeuzadenn "Les Abers" (Plouvian), PLC (Dirinnon), ha SICAMOP (Werliskin).

500 000 pemoc'h a vez savet gant PRESTOR bep bloaz. 25 produer moc'h a zo kenstrollet ennañ.

Bremañ : Manifestadegoù labourerien douar a zo bet gwelet nevez 'zo un tammig e pep lec'h, e Breizh hag e Bro-C'hall. Bremañ : Petra eo ar c'hudennoù a lak al labourerien douar da vanfeñst gant kement a nerzh ha kement a teuz a-wechoù ?

Guillaume Roue : Daou vloavezh sechor a zo bet an eil war egile. Er bloaz paset e oa bet sechor vras e Bro-C'hall, hag e Breizh ivez. Er bloaz-mañ ez eus sechor ardar. Soñjet hon eus edo poent deomp ober un dra bennak evit ma chomfe ar belzanted en o sav, rak leun a belzanted o deus kollet arc'hant gant ar sechor.

Hag ouzhpenn-se, er bloaz-mañ, ez eus diaezmantoù bras war ar c'hig, rak ar priz en neus diskennet kalz. Labour ar sindikad a zo lavaret d'ar gouarnamant penaos ez a an traoù. Bez ez eus bet skrivet allies a-walc'h da vinistr al Labour-Douar ha d'ar C'hentañ Ministr ivez. Ha pa na vez respont ebet, evel tout ar micherioù all, e rankomp ni ivez mont war ar stradaoù bep an amzer.

Evit ar problemoù a zo bet er bloaz-mañ, marteze ez eus bet muioch a drouz eget na 'z eus bet gwechall. Ar produerien g'ig a zo pase fall ar jeu ganto. Hag evit ar sechor, evit ar bloaz paset, an Actrou Nallet en doa lavaret e vije kalz sikour evit ar belzanted. Sañset ez eus bet sikour war ar paperioù, ne 'z eus ket bet sikour ar arc'hant evit bremañ, rak e-giz respont da doud ar manifestadegoù



Guillaume Roue (a-zehou)

a zo bet nevez' zo, e vezo paeet ar sikour evit ar bloavezh paset adalek ar pemzek a viz Gwengolo er bloaz-mañ.

Bez ez eus bremañ ur marchad, hag ur marchad bras, pezeogwir ez eus 12 bro o labour asambles er Marchad Kumun. Bez ez eus bet problemoù : ar Marchad Kumun zo bet ganet d'ja 30 bloaz 'zo, ha

d'ar poent-se e oa ezhomm ober un dra bennak etre tout ar broioù-se. Da gentañ, ne oant ken met 6, ha bremañ ez eus 12. Evit en em gavout eus 6 da 12, ez eus bet leun a vale, ha leun a amzer. E 1980 a oa bet divzet e teufe, e-barzh ar Marchad Kumun, Bro-Spagn ha Bro-Portugal. 10 vloaz zo bet ezhomm memestra evit lakaat an traoù da vont en-du.

Un dra gaer evit an dud a zo en em gavet e fin ar bloaz paset, pezeogwir ez eus bet kalz a cheñchamant e-barzh ar broioù a zo en tu all da Voges vBerlin. An dra-se zo mat. Sañset traoù mod-se a zo mat evit lakaat an dud da vevañ asambles, evit miret na vije kannoù etrezo. Evit an dud, ni gav deomp, ez eo mat kement-se. Memestra, gant an dud e teu ivez leun a draoù. Ha war sektor al labour-douar, ha sektorioù all ez eus problemoù. Heñvel eo an traoù evit an dud a zo war sektor ar siderurji, pe hini ar glaoù : bez e vezo kalz a ziaezmant ivez, pezeogwir e kustum tud ar broioù-se labourat kalz gwelloc'h-marchad egedomp-ni. D'hor soñj, n'eo ket posubl e vefe laosket ar mod-se tout an ekonomiezh da vont d'an traoù, hec'h unan, hep na vije kemeret nemeur a zuzulioù.

Bez ez eus bet manifestadegoù er vro-mañ, hag e Bro-C'hall, met n'eo ket evit lavaret d'an Actrou Nallet ez eus un dra bennak da ober e Bro-C'hall hepken : bez ez eus un dra bennak da ober e-barzh ar Gumuniezh, e-barzh ar Marchad Kumun, ha n'eo ket divizoù war dachenn an ekonomiezh eo a da d

bremañ



gemeret, met divizoù war dachenn ar bolitikerzh. Ha ma ne vefent ke kemeret, ez aio d'an traoù tout a labourerien douar eus sektorioù produksion ar Marc'had Kumun a yelo d'an traoù, an dra-se zo sur.

N'eus ket nemet kemer ur skouer : ar c'hilio kig bevin a goust amañ etre 10 ha 12 lur nevez, hag e-barzh Bro-Boloz, ne goust nemet 2 lur hanter. Ma ranker ober ar well-waz etre an daou briz, n'omp ket gouest da chom en hon sav. Setu, paseet ar blijadur o deus tout an dud o sellout doc'h ar broioù-se o vont war hent al liberte, eo ret prientiñ mat etledoù al liberte nevez-se warnomp-ni : ma teu al sklavouriezh evidomp-ni, n'eo ket posubl. Evit an dra-se, ni n'amañ ket en hor soñj sevel ar Voger en-dro. Ar pezh en doa lavaret deomp an Aotrou Dabrowski, a oa deuet ar sizhun pasel e-barzh ar vro ; hennezh a zo un den e kang e-barzh Solidarnosc Labour-Douar, hag a lavare deomp : "Ni hon eus pilot ar Voger ha c'hwî amañ en ho soñj sevel anezhi adarre." Nann, n'eo ket an dra-se ez eo. Ma 'z a gwelloc'h an traoù evit an dud-se ez aio sanset gwelloc'h evidomp-ni ivez. Memestra e ranker kemeret amzer evit lakaat an traoù da vont endro. An dra-se, me gav din, a zo un dra bouezus.

Bez eus ivez traoù a zo diouz kiriegezh gouarnamant Bro-C'hall. Evit ar sec'hor, n'eo ket ar Voger en deus degaset ar sec'hor amañ. Evit ar sec'hor, an Aotrou Nallet en deus muzulioù da gemer. Bremañ sañset en deus kemeret anezho. Memestra evit lakaat anezhañ da gemer e vuzulioù, hon eus ranket kas ar beizanted war an hentou.

Bremañ : Kinnigoù a zo bet graet just a-walc'h gant ministr al Labour-Douar. Evit doare n'oc'h ket re iaouen ganto.

Guillaume Roue : Gouzout a rez, ral a wech e vez roet gant ar ministr tout ar pezh a vez goulenet digantañ. Setu, evit Bro-Frañs a-barzh, ez eus bet goulenet etre 5 ha 7 miliard lur nevez, hag ar ministr en deus lavaret e vezo 1,2 miliard hepken. N'eo ket re fall. N'eo ket re fall evit komañs...ma 'z eus traoù all da c'houde. Pezh a zo, ar miliard-se, ez eus estreget archant a zeulio e-barzh godelloù ar beizanted. Bez eus archant



Henri Nallet
ministr al labour-douar

prestet ivez hag ar beizanted a ranko restoret anezho. Setu evidomp-ni, ne gont ket ar seurt archant-se evit archant hag a chomo e-barzh godelloù ar beizanted.

N'eus ket klevet ar ministr o lavaret e vo graet un dra dennek war dachenn ar bolitikerzh e Brusel. N'oc'h omp gant an dra-se, ha me 'm eus aon, goude ma vije degaset ur miliard lur nevez bremañ, e vo ranket a-benn tri pe bevar miz, degas kement-all ma n'eus ket kemeret muzulioù gouest da lakaat an traoù da vont en-dro adarre.

Bremañ : Ar ministr en deus diskleriet ez eus ur mell digresk war an debrñ kig-bevin e Bro-Frañs a-bezh : 12% nebeutoc'h a zebr an dud hiziv an deiz eget tri bloaz 'zo. Petra eo ho soñj diwar-benn se?

Guillaume Roue : An dud a gustum debrñ un tammig ouzhpenn 100 kilo kig bep bloaz. Un dra zo sur : ne gresko ket ken ar c'hemmatoc-se. Gant "Moger ar Stomokour" omp en en gavet. Bez ez eus, me gav din, e-touez ar 100 kilo-se, 30 kilo kig bevin. Hag ar c'hig-se, d'hor soñj, n'eo ket ker a-walc'h evit ar broduerien, ha pa vez en em gavet gant ar bevezer (koñsomatour), e vez uhel ar priz anezhañ memestra, e-keñver prizioù an doareoù kig all : ar c'hig mouch a zo keroc'h ivez bremañ, met ar c'hig yar n'eo ket ken ker-se. Hag ar c'hig yar a zo bet "elaboret", setu ez eus moien da zebrñ kig yar, marteze pas bemdeiz, met aliesoc'h.

Hag ouzhpenn-se ivez ez eus bet ur problem bras abalamour d'ar c'hleñved gant ar saout e Bro-Saoz, anvet "kleñved ar saout foll". E Bro-Saoz, ar c'hig en deus diskennet kalz, me 'gav din ez eus bet betek 30% a ziskenn war ar c'hig a vez debrat gant an dud eus ar vro-se. Setu, tout ar c'hig-se a zo deuet amañ, hag ez eus bet, war ar marc'had amañ, un diskenn bras war ar prizioù. Hag ar bevezer (koñsomatour) a gav dezhañ diouzhtu n'eo ket mat ar c'hig ma 'z eus re a ziskenn war ar priz. Ha war tout ar marc'hadou e vez gwelet an dra-se.

Hag ouzhpenn-se, d'hor soñj ivez, ar boued n'amañ ket er plas kentañ ken e budjed ar familhoù.

Bremañ : Troomp war-zu ur gudenn all : hini an dour, hini an nitrat, hini an dour-hañvouez. Petra eo kinnigoù ho sindikad war an dachenn-se?

Guillaume Roue : Bez ez eus tud, ha kevredigezhioù hag a zo kreñv a-walc'h bremañ, hag a soñj ez eus diazant an traoù da gaout ma 'z a an dregantad a nitrat war greskiñ e-barzh an dour. Bez ez eus tud, sañset, hag a zo "adoret" evit kaozari, hag a soñj ivez ne vezo ket mat evit yec'hed an dud ma 'z eus re a nitrat e-barzh an dour. Ma 'gav din ez eus traoù d'ober sur a-walc'h, hag al labour-douar en deus ezhomm ivez da vont war wellaat evit ma vije nebeutoc'h a saotradur. War an dra-se, ez eus ur problem bras, me 'gav din.

An dud n'o deus ket bet a problemoù evit debrñ pell 'zo. 40 vloaz 'zo bremañ e vez a-walc'h da zebrñ evit tout an dud (e-barzh ar broioù-mañ ; n'eo ket heñvel e-barzh tout ar broioù all). Setu n'eo ket ur preder ken evit an dud, en em c'houlenn penaos o vo debrat warc'hoazh. Bremañ ez eo peseurt kalite a vezo ha n'eo ket peseurt kementad a vezo.

Setu war an dachenn-se, ez eus bet ivez konsatrasionoù an tiegezhioù, hag e vez gwelet bremañ tiegezhioù saverien voch, gant kalz mouch o vevañ savet enno, setu sertainamant, e vez diazant. An dud a soñj diouzhtu e vez saotradur pa vez c'hwet fall. An dra-se n'eo ket gwir. Pezh a zo gwir, ma ne vez ket taolet evezh, evit lakaat an hañvouez war ar parkeier, ma 'z eus re a ziskenn e-barzh ar park, ma 'z eus dour oc'h ober re a c'hilav, e c'hell an hañvouez mont diouzhtu e-barzh ar sterioù. Ar c'hlevredigezhioù labour-douar a ra war-dro an dra-se, o deus lavaret pell 'zo d'ja d'ar beizanted e rankont teurel evezh ouzhtout an dra-se, hag evit an temzoù chimik ivez. Setu bremañ, e kav deomp ez eo un dra pouezus teurel evezh evit ma vije gwelloc'h an dour, ha war un dro, ez aje gwelloc'h an traoù evit ar beizanted hag an ekonomiezh.

Pezh a zo gant ar c'hlevredigezhioù ("ekolojisted"), evit ar re-se, ne gont ket an ekonomiezh, pezh a gont eo dour mat hag ar peurest n'eo ket kalz a dra. Bez eus labourerien douar ha n'int ket sirius a-walc'h marteze, me 'gav din memestra e vezo kavet er bloavezhioù da zont, doareoù evit miret na vije re a saotradur.

Met pezh a gont, me 'gav din bremañ, evit tout an dud a zo o vevañ endro deomp, eo aes a-walc'h dezho lavaret ez eo fall an dour hag e c'hellomp bezañ klañv diwarañ. Me n'em eus gwelet den ebet o vevañ diwar evañ re a zour, diwar evañ re a win na lavaran ket. N'eo ket an dour a lak an dud da vevañ. Setu ... vevañ asamblez n'eo ket aes.

War dachenn an ekonomiezh emaoamp-ni, met memestra war hini ar c'hilav evit kavout gwerzh d'hor traoù.

Un dra vat a vefe evit an dud a zo o vevañ en hor c'hichen, ma ne vefe ket re a c'hwet fall, ma c'hellent evañ dour

hep nec'hamant, pa vez lakaet ur banne dour war an daol, ma 'z a an dud da sellet pizh e-barzh ar werennad... n'eo ket mat an dra-se.

Ouzhpenn-se ivez, n'eo ket al labour-douar e unan a zo kaoz d'ar saotradur-se. Bez vez gwelet partoud, lec'h ma n'eus ket a stasionoù-puraat. Heñvel er c'hilav : e Landerne, ar maer en deus divizet bremañ reiñ lafs d'ur program bras... An dra-se a zo mat, me 'gav din. Met deg vloaz en deus goulenet evit ober an dra-se. Setu, an dud ne c'hellont ket goulen digant ar beizanted ober tout diouzhtu. Amzer a ranker da gaout.

Petra eo ho soñj diwar-benn al labour douar biolojik?

Me 'gav din ez eo aet kalz war raok al labour douar "tradisionel" e 30 bloaz, hag an dra-se en deus kaset ar beizanted da vevañ un tammig gwelloc'h o stal eget arao. Bremañ ar beizanted a zo hañvel doc'h an dud all. Ar beizanted ivez a zo o labourat e-barzh embregerezhioù.

Bez ez eus tud a soñj e rank an dra-se cheñch, n'eo ket mat evit al labourerien douar sevel o mouch gant boued a vez prenet e lec'h all, n'eo ket mat lakaat temzoù chimik... Ar re-se a gav dezho e vije un tamm mat gwelloc'h ma vije lakaet an traoù da greskiñ gant traoù naturel. Ma 'gav din ez eus, aze evel e lec'h all, tud hag a zo sirius ha tud ha n'int ket. Memestra, marteze ne vez ket klasket a-walc'h e-barzh ar c'hlevredigezhioù (labour-douar), hag e lec'h all, doareoù evit lakaat al labour douar biolojik da vont endro.

Marteze ez eus moien da vont war an hent-se. Met me 'gav din n'eo ket poent bremañ lavaret da dout an dud mont war an hent-se, pezegwir, me 'gav din, n'eo





Setu, ma 'z eus tud hag o deus c'hoant da gas o bugale d'ar skolioù Diwan, evidon-me, hag evit ar sindikad, ez eo naturel an dra-se. Hag ouzhpenn ne welan ket perak e vije paet evit an dud eus Kriteleiz Bro-Frañs, ha ne vije ket paet evit tud ar vro-mañ.

Bremañ : Da echuiñ, penaos e weilit al labour douar e Breizh a-benn ugent vloaz.

Gillaume Roue : Diaes eo respont. Memestra, me 'gav din e rank bezañ sklaer an traoù. Bremañ ez eus 13% eus an dud a gustum labourat er vro-mañ, o labourat war dachenn al labour-douar. E Bro-C'hall n'ez eus ket met 6 pe 7%. Al labourerien douar a zo kozh evit kalz anezho dija. 50% eus al labourerien douar a zo ouzhpenn 50 vloaz bremañ. Hag ar re yaouank n'ez eus ket kement ken anezho ha ma oa gwechall. E 1960 e veze ganet 2000 bugel bep bloaz e-barzh al labour-douar, ha bremañ ne vez ken nemet 500. Sur a-walch ne vo ket kement a beizanted yaouank oc'h en em staliañ ha ma oa gwechall.

D'am soñj, war al labour douar, dre-holl hag er vro-mañ, ez aio an tiegezhioù war



ket ledan a-walch evit tout an dud. Setu, ma vez ur marc'had evit ar re-se, ma vez tud gouest da baeñ keroc'h pezeogwir e vez keroc'h ar produioù bio, pezeogwir n'eus ket kement a randamant gant an doare labourat-se, e chello memestra al labour douar "tradisionel" mont en-drc evit ober ar "ganolerezh ponner".

Un tamm mat gwelech e vije memestra ma vije kaozeet etre an dud hag n'eo ket lavaret diouzh un tu ez eo fall an tu all. Diaes eo evidon-me kaozeal diwar-benn an dra-se, pezeogwir n'anavezan ket mat al labour douar-biolojik.

Bremañ : FDSEA Penn ar Bed, kerkoulz ha sindikadoù labourerien douar all o deus galvet d'ar manifestadeg "Justis evit Diwan" e Landerne, d'an 9 a viz Mezheven 90. Petra en deus lakaet ac'hanoc'h da vont war an dachenn-se ivez?

An dra-se zo simpl a-walch : me zo ganet e-barzh un tiegezh e Lambaol-Vitalmeze, ha va zad, va mamm, va zad-kozh ha va mamm-gozh a gustum kaozeal brezhonag bemdeiz. N'em eus ket desket brezhonag ar skol, me m'eus desket brezhonag "war ar bern", e-giz ma vez lavaret. Me 'soñj ez eus e-barzh ar yezh-se traoù souñj 'zo na vezont ket kavet e galleg.

Hag ouzhpenn, me 'gav din, ma n'ez eus ket a wrizioù e-barzh ur vro (tout an dud o deus ar memes gwizioù : ar yezh, ar pezh a zo tremenet e-barzh ar vro gwechall), ma n'eo ket gouest an dud d'en em gompren asambles, ha delc'her ar pezh a zo bet gwechall, n'eo ket mat. N'ez eus ken nemet salet doct tout ar broioù a zo bet diwrizienet : pa ne vez ket a wrizioù, e vez kannoù etre an dud, pezeogwir n'int ket gouest d'en em gompren.

greskiñ. Ret eo esperout e vezo memestra plas a-walch evit tout an dud evit produiñ pezeogwir gant tout ar pezh a zo c'hoarvezet er bloaz paset (an dra-se a zo evit ar pezh am eus lavaret da gentañ diwar-benn broioù ar Reter) e vezo diaezamant, kredapl bras, hag ouzhpenn, me 'gav din, ne vo ket plas ken evit tout an dud war al labour douar tradisionel.

Ma n'ez a ket ar beizanted war tiegezhioù frammet heñvel doct'h embregerezhioù, e vezo kalz diaezamantoù, kredapl, pezeogwir n'ez aio ket da greskiñ ar prizioù produksion war al labour douar. Me 'gav 'din ez aint da zigreskiñ. Setu, e vo ranket produiñ muioc'h evit kaout ar memes leve. N'on ket sur kant dre gant eus an dra-se. Memestra pa vez gwelet penaos ez a ar micherioù all en-dro bremañ, e vez kemeret tout ar marc'hadoù, evit 80% gant stalioù bras, hag evit 20% gant stalioù bihan. Me 'gav din e vezo heñvel evit al labour douar. 80% gant tiegezhioù bras, ha 20% gant tiegezhioù bihan. E ekonomiezh, e vez graet reolenn ar 80-20, an 20-80 eus kement-se.

DOUR A VANK

Sec'hour adarre ...

Evel warlene hon eus bet adarre ur bloavezh a sec'hour. Kaer zo lavarout dimp eo reizh e vefe bloavezhioù sechoc'h eget re all, n'omp ket evit mirout a vezan nechet, rak sklaer eo, n'hall an traoù nemet gwashaat.

Pennabeg : an digodañ


Da gentañ, evel just, ablamour m'emañ ar blanedenn o tommaat. N'eo ket an ijinezeh hag ar c'hirri-tan hepken a zo kaoz : an digodañ, hag an toullan-hantioù (evit ar c'hirri-tan) a zo da damall ivez. Ar stêrioù-bras zo deuet da vezañ kanolioù a red buanoc'h d'ar mor, ar wazhoù eounaet ne c'hlabont ket mui an douaroù evel ma raent gant o c'hammdroioù, ar gwez diskaret n'emaint ket aze da zerc'hel an douar hag an dour. Bep ar mare e vez kaoz da adkodañ, met ne vez graet mann : keit ma ne vo ket paset an distrojerien evit adsevel evel m'int bet evit diskar, n'omp ket prest da welout kamm aze moarvat, ha gwazh a se evidomp.

Diskoulm : plantañ gwez en tachennoù-golf ?

Un dra zo sur : emaoimp o vevañ an dek vloaz tommañ eus ar c'hantved, hag abalamour da se ne ra nemet kreskiñ an dispign-dour. Seul sechoc'h an hañv (seul nebeutoc'h a zour), seul vluoc'h a zour a vez tennet da skulhañ war ar parkeier ha war al liorzhoù, ha seul nebeutoc'h e chom en douar. Evit c'hoazh ne weler ket penaos e c'hall ar rod paouez da dreñ an tu-se.

Kement ha chom hep teurel ar bec'h war al labourerien-douar : ral eo ar c'harioù na zouront ket o bleunioù e-pad an hañv, "abalamour d'an douristed", emezo. Dour e-leizh a vez taolet war an 300 bennak a dachennoù golf a zo er c'hwech'hogn ivez : war un dachenn 60 kement a zour ha ma vez ezhomm gant 5000 a dud. Ha ma 'z'afe an "Emsav" da blantañ gwez en tachennoù golf ?

OUZHPENN 700 BUGEL !



Pennabeg : an digodañ

Ur prantad hir a 13 bloavezh-stourm a zo o paouez echuiñ gant an emglev sinet etre Diwan hag an Deskadurezh-Stad d'ar 27 a viz Gouere diwezhan : evit ar wech kentañ ez eo anavezet skolioù Diwan gant ar Stad gant o doare kelenn, eus ar skol-vamm betek dibenn ar c'hentañ derez. N'eus netra diazezet da vat, koulskoude, ha gant stummoù nevez e ranko Diwan ober evit kenderc'hel da vont war-du ar pal, "un deskadurezh dre ar brezhonag eus ar skol-vamm d'ar skol-veur, war bep tachenn eus ar c'helenn" : ma 'z eus bet krouet 51,5 post-dre-gevrat, n'eus netra resis e-keñver krouiñ postoù ha stummañ mistri nevez, Diwan a ranko kloukaat pae ar skolaerien. Krogadoù a vo c'hoazh, met ur c'hañs eo evit Diwan da lakaat degemer he sistem deskadurezh e gwirionez.

Abaoe ar bloavezh 1977 ma voe divizet sevel Diwan "abalamour da vankoù an Deskadurezh-Stad na ro ket he flas d'ar brezhonag" ez eus bet graet hent. Eus an douezennad a wugale o vont d'ar skol, koulz lavaret dre guzh, d'ar 700 bennak a grouadurien a vo en distro-skol-mañ, degemeret hag harpet allies gant an tiez-kêr hag ar c'huzulioù departamant, gant skolaerien gopret gant ar Stad, emañ istor un adsav hag ur stourm pennek ha padus a-enep ur galloud en deus graet kement-tra evit mirout ouzh al lanv da sevel.

Ur stourmad hir

Gant skoazell an dilennidi, lakaat tamm ha tamm da gemer perzh er stourm, e vo sinet ur c'hontrad nevez anvet "protocole" d'ar c'hentañ a viz Ebrel 1988 : ar Rannvro hag an departamantoù a oa perzhiek ennañ. Met daou vloaz goude, ne oa bapred nemet daouzek post kemeret e karg, dindan statud ar skolioù prevez anvet "contrat simple" hag an 9 a viz Gouere 1990 e veze nac'het c'hoazh gant ar rektor joprañ pevar skolaer klasoù mamm dindan digarez na veze ket graet gant ar

DESKADUREZH DIWAN ANAVEZET EVIT

galleg enno. Ne oa tu neuze da lakaat dindan gevrat nemet ar c'hlasoù CM1-CM2 hag a zere d'ar Stad.

Teir sizhun war-lerc'h ez eo koulz lavaret an holl skolaerien (51,5 diwar 55,5) a veze lakaet dindan gevrat gant ar Stad, dre emglev ar 27 a viz Gouere 1990, hep lakaat, evit ar wech kentañ, goulakadenn ebet e-keñver yezh ha doareoù-kelenn pe niver ar vugale. Un arakadenn ramzel, met o tont goude un hir a stourm ha manifestadeg vras

Landerne e miz Mezheven he doa diskouezet nerzhioù an holl Vretoned, dilennidi koulz ha nerzhioù kevredigezhel (FDSEA, UDSEA, CFDT, hag all...) a-dreñv da Ziwan.

Un trec'h a-bouez

Evit prezidant Diwan, Youn Bodenneg, ez eo an emglev-se un trec'h a-bouez : "Daou vloaz zo e oa c'hoazh an Deskadurezh-Stad oc'h embann er

c'hazelennou e veze lakaet ar vugale war-lerc'h gant Diwan. Hiziv an deiz e ra un O.P.A. hep marc'hata. Tud 'zo o deus aon eus ar skeudenn fall a vefe gant hor skolioù a-dreuz ar stourmoù hag ar manifestadegoù. E gwinonez, ar boblañs n'eo ket diseblant hag estlamm he deus zoken evit ar re en em gann war-du ur pal, dreist-holl pa c'houezont evel ma ra Diwan".

Evit ar skolaerien ez eo ivez ar wech kentañ e vez doujet ouzh o labour hep pismigañ. Jean-Yves Mer, ezel eus ar



sindikad CFDT, hag a zo bet o kemer perzh er c'hendivizoù gant ar Stad en anv ar skolaerien en deus santet ur cheftchamant a-berzh ar galloud : "ar Stad, betek hen, ne felle ket dezhi sellet ouzhip evel gwir skolaerien, n'he doa nemet dispiz evit hol labour. Da vare Chevenement ne oa nemet pismigachou, war gementad ar galleg da skouer. Un aergelc'h nevez a zo bet bremañ er rektori. Degemeret omp bet e-giz ma oamp. Deomp eo da ziskouez talvoudegezh al labour a reomp, o vezañ un nerzh frankil".

nerzh diazezet war ezhommoù ha gwirioù don". Met gouzout a ra, mard eo "Sekouret ar skolaerien gant an emglev-se, e ranker chom war ovezh". Ur barn labour a zo war ar stern. Evit ar mare n'eo kemeret ar skolaerien nemet war ziazez skeul ar stajidi, da lavarout eo 5600 lur ar miz net. Hervez kevrat labour Diwan e c'houez ur skolaer dezhañ 10 vloaz labour war-dro 8000 lur ar miz hep kontañ ar c'hargoù a ranko Diwan kenderc'hel da baeañ.

Mankoù ha diaesterioù

Dindan c'hwec'h bloaz e ranko an holl skolaerien tremen kenstrivadeg diabarzh skolaerien ar Stad, hervez lezenn

LE PORS 1984 ar gargidi-stad ha n'eus ket da grediñ e vefe dalc'het kont eus ar brezhoneg hep stourm. Netra ne vire neuze ouzh ur skolaer da vezañ anvlet en diavaez da zDiwan.

N'eus bet rakwelet netra evit stummañ skolaerien all rak diskouez a ra an deskadurezh Stad bezañ souezhet pa 'z eus kaez da ziorren rouedad skolioù Diwan. Ar skolaj a chom en diavaez d'ar gevrat koulz hag ar fardañ danvez pedagogel.

Degemeret eo "evit ar mare" hervez mellad 3 ar gevrad doare kelenn Diwan : kelennerezh ar galleg tamm-ha-tamm er

AR MARE

FEULSTER

c'hentañ derez, live ingal e galleg ha brezhoneg e dibenn ar c'hentañ derez. Met kendeuziñ Diwan gant ar c'hlasoù "divyezhek" meret ganti a vo pal an Deskadurezh-Stad.

A-bouez e vo neuze ar bodad-labour Diwan-Deskadurezh a vo e roll priziñ al labour hag an disoc'hoù. Penaos e c'hoario an Deskadurezh er bodad-se ha Diwan diouzh he zu, seul vui ma n'eus ket, evit ar mare, "un aergelc'h a fiziñs anat etrezo", diouzh pezh a lavar tud Diwan.

Mat, forzh penaos, gouzout a ra emsaverien Diwan, skolaerien koulz ha kerent, n'eo an emglev-se nemet ur bazenn ouzhpenn war-du anaoudegezh ar brezhoneg en deskadurezh. "Ur c'hañs istorel a zo da dapout aze evit mont pelloc'h" eme unan eus ar skolaerien ha tad bugale e Diwan. Penaos e troio Diwan hag an deskadurezh brezhoneg ? Den ne oar c'hoazh, rak, "ar Stad ne oar ket hec'h unan betek pelloc'h ez aio" eme Jean-Yves Mer.

Tangi LOUARN

DOAREOÙ MANTRUS !



Implijidi Diwan a zo mantret o welet an doareoù implijet gant ar polis, d'ar Meurzh 24 a viz Gouere 1990, e-doug ar prosez graet da zaou ezel eus ar gevredigezh Diwan.

An dud a oa deust da skoazellañ anezho n'o deus ket diskouezet bezañ drouk ha koulskoude skeot o deus ar boliserien warno betek gloazañ unan, a zo bet ranket kas d'an ospital. Ne c'hellomp ket asantiñ da seurt doareoù.

Da eil, mantret eo implijidi Diwan, ivez, gant ar c'hasiz roet d'an daou zan barnet : skrivañ war ar mogerioù a zo un doare 'vel unan all d'en em zifann ha n'eo

netra e-keñver 13 vloaz a zismegañs hag a c'hoaserezh a-berzh ar Stad.

Penaos labourat en un doare dibredet pa vezer en arvar da goll hol labour ? Dibabet hon eus atav doareoù fur ha siveal da stourm. Daoust hag e faot d'ar Stad gwelet ac'hanomp o kaletaat anezhañ ?

Peadra zo d'en em soñjal rak oc'h implijout doareoù dereat ober a ra skouarn vouzar ; o vezañ taer an disoc'hoù a zeu diouzhu 'vel e Bro Euskadi, Bro Korsika ...

Implijidi DIWAN
CFDT DIWAN

kemennadenn

Pa lavar Prefed Penn-ar-Bad bezañ ken heugent gant "youl feuls kouerien Breizh" o vanifestiñ e kemper d'an 23 a viz Eost 1990, e c'haller bezañ souezhet gant doareoù ar prefed-se a zibab an tachennoù da ziskouez e heug.

Goulenn a ra Stourm ar Brezhoneg soñj Prefed Kemper diwar-benn feulster ar polis da geñver prosez daou zen eus

Diwan d'ar 24 a viz Gouhere e Brest.

Pe marteze, gouez dezhañ, ez eo reizh ar feulster pa vez gant ar polis hag ar stad a wask ar Vretoned hag a nach o gwirioù, ha direizh ar feulster pa vez gant ar Vretoned a zifenn o gwirioù e Breizh.

S.A.B.
26 VIII 1990

TRO AR SKOLIOU

SKOL DIWAN BRO NAONED



Echu eo evit ar skol e straed Harrouys. Goude 3 bloavezh e lorch ar CNCC kozh (bremañ Ti Keltiek) e tilec'h ar skol evit mont war vord an Herz e karter ar Jonelliere. A-hont e vo staliet Diwan adalek miz gwengolo e-barzh skol vamm gozh ar c'harier goude labourioù kaset war-raok gant an ti-kêr evit nevesaat ha kempennaat ar savadur. Etre 1979 ha 1984 e oa bet eus ur skol Diwan dija. Ar skol-se he doa kroget en ur rann di eus ar "Sillon de Bretagne" (hanternoz Naoned)

a-raok mont d'en em staliañ er CNCC (Kreizenn Severadural Gelliek Naoned, aet da get, siwazh). D'ar mare-se ne oa nemet ur skol vamm.

War-lerc'h un troc'h a dri bloavezh eo bet digoret en-dro ar skol (1987), dre ma oa chomet bev Kuzul Skoazell ar skol "Evit Diwan". Ur skol nevez eo a zo bet digoret d'ar c'houlz-se peogwir e oa nevez an holl dud a gemere perzh enni. Adkempennet oa bet an ti skol gant tud

ar vugale evit degemer ar c'hwec'h skollad er skol vamm. Bremañ 25 bugel enni, rannet e daou glas : 21 etre kevrenn ar re vihan hag ar re grenn, 4 er c'hentañ derez, da lavarout eo e vez degemeret bugale adalek 2 vloaz betek ar c'hlas 2, evit ar poent.

niver a skolidi : 25
 niver a familhoù : 19
 niver a skolaerien : 2
 niver a implijidi : 4
 (2 skoazellerez, 2 tuc)

UI lezenn stur evit ar Brezhoneg

Emañ ar strollad "Evid Lezenn ar Yezhoù" o paouez lakaat un termen d'ar strivadenn roet lañs dezhi daou vloaz zo, a giminge da guzulier departamant Breizh-Izel (ha da Guzul Rannvro Breizh) votañ ur skrid o c'houlenn ma vefe savet ul lezenn-stur evit ar brezhoneg (ha yezhoù all Bro-Frañs).

Setu amañ ar mennadoù Kuzulioù-Kêr, dastumet :

BREIZH IZEL 478 (82,41% eus ar parrezioù)

- Penn ar Bed 281 (99,29% eus an 283 farrez)
 - Aodoù an Arvor. 116 (69,04% eus ar 168 farrez)
 - Morbihan 81 (62,79% eus ar 129 farrez)

BREIZH IZEL 71 (eus ar 100 komun kinniget dezho)

En holl 549 mennad eus 549 farrez
 (1 347 048 a dud o chom enno)

Diwar an 9300 a guzulierien o vezañ kemeret perzh e mouezhiadeg o c'huzulioù n'eus bet nemet 47 kuzulier chomet d'du ha 31 o vezañ mouezhiet a-enep.

Hervez kemennadenn ELY, miz Gouere 1990.

ADKOUMANANTIT DA V-

breman

150 iur ar bloaz

IRAK

Marc'hadourien

Diouzh klevout hon renerien c'hall o deus kaset soudarded da Arabia (hag en o zouez meur a gant vreizhad oc'h ober c servij) emaint o vont da zifenn ar gwir etrevroadel hag harzoù ur vro aloubet gant ar peizher Saddam Hussein.

Difennerien gwirioù mab-den

Ur mac'homer eus ar re washañ eo rener Irak, ha tra ma veze enoret gant ar gouarnamant gall n'eus ket gwall belloù, hon eus bet tro amañ da ziskleriañ pegement a wad en doa war e zaouarn, pa lazhe ar Gurded gant aezhennoù mousus (diwar nijereziou "made in France") ha pa jahine bugale e eneberien, evel en deus diskleriet Amnesty International en e vloazievr diwezhañ.

Ha klevet ho poa neuze renerien ar Stad C'hall, difennerien veur Gwirioù Mab-Den emezo, o klemm ma ne veze ket doujet d'ar gwirioù-se gant Irak ? N'ho poa ket, evel just. Rak harvez rajien ar stadoù, ne oa an torfedoù-se nemet aferioù diabarzh, hag evel a ouzomp, n'o deus ket ar stadoù da emellout e-barzh aferioù diabarzh ar stadoù all. Gallout a raio Adolf poazhañ e yuzevien ha Saddam mougañ e Gurded, mann da larout. Arabat terrin reolennoù ar marc'had avat. Peserit marc'had ? Hini ar patataez-had hag ar yer o vont eus Breizh da Vagdad ? Nann, evel just. An hini frouezhusañ, hini an armoù.



Ho pet soñj : e 1974 pa oa Hussein o vombezañ Kurdistan gant e dankoù e nijas Chirac da Irak, da werzhañ efedusted ar c'hirri-nij brezel gall, ha da douññ mignonezh da toññ Bagdad. E miz Genver diwezhañ edo Chevenement e Bagdad ivez o werzhañ kirri-nij flamm-flimmin, hag o kemenn e oa "un den a boec'h" eus bourev ar Gurded. Na brav e oa Ioi Amin Dada ha Bokassa pa oant sentus !

Etre an daou zavroud-se, ur brezel spontus ouzh Bro-Iran, kroget gant Irak e 1980, sur ma oa Hussein da gant skoazell e vignoned c'hall. "Evit stourm ouzh sponterien Teheran", a lavared Jimmy Gevier bras da Iran evel da Irak e veze gwerzhat armoù gant ar C'hallaoued (ho pet soñj eus an afer Luchaire, an Irangate gall) en despad d'al lezenn. Met lezenn an arc'hant a ra van ouzh al lezenn ?


Ha bremañ e vefe ret dimp krediñ ar bipouzed-se pa ambannont emaint o tifenn ar sevenadur (hini Exxon, Shell, h.a.) hag an demokratelezh (hini an emired). Ha gwirioù mab-den ivez marteze ? Nebeutoc'h a drouz a reont evit goulnenn digant Israel kuitaat an douaroù aloubet ganti : gwir eo n'eus takenn t'reoul ebet e barzh, ha gwazh a se evit ar bobl.

Gweltaz KERAMBRUN

INDIANED KANADA

Maer Oka en doa c'hoant da sevel un dachenn golf war douaroù an Indianed (Ganienke) abaoe penn-kentañ an nevez-Amzer. Kudannoù a oa bet savet etre ar re wenn hag an Indianed. Met n'eus ket bet tu kaout kalou eus an darvoudoù-se nemet adal ma oa bet lazhet ur polis gwenn d'an 11vet a viz Gouhere. Stanket e oa bet an hantou a rede etrezek an douaroù ganienke gant ar "warriors" (stourmerien ar meuriad ganienke, armet mat ha mennet).

Goulnenn a reont digant Rannvro Gebek ar pezh a c'houlenn Kebek digant Bro-Ganada : "dieubidigazh ar vro indian a zo (ledanet) diazezet en daou du da harzoù Kebek-Stadoù Unanet ha sevel lezennoù ganienke". Mauriadoù indian ar vro en he fezh o deus diskleriet bezañ ar gou gant "Ganienke" eus Kanesatake,



Kanewake hag Oka. Sevel a ra gouarnamant Kanada a-du gant hini Kebek evit machañ an indianed.

An arme zo deuet da reiñ dorn da boliserion Kebek, padal e oa dilennidi ganienke ha gouarnamant kebek o klask un diskoulim difeuls. Daoust ma n'eus ket bet kavet un diskoulim eo deuet an traoù da vout sioulc'h, dirak an arme, ar c'hirri-tan hag an "destroyer" a zo bet kaset war ar stêr St Laurent. Lod eus ar "warriors" a chom mennet da stourm.

Evezhiadenn : - Petra eo jeu ar gouarnamant gall en afer-se ?

- Pell zo ne oa ket aet ken pell Stourm an indianed en Amerika.

Y.V. THOREL

ETREVROADEL

Iwerzhoniz en toull-bac'h e Pariz

Tri iwerzhonad a damaller dezho bezañ izili eus an IRA a-zevot gant ar Vro-Alamagn. A-du eo aet Lez-Varn Pariz gant goullenn ar gouarnamant alaman a glaske war-lerc'h an tri den-se goude un taol graet gant an IRA a-enep kazarn saoz Osnabrück en Hanternoz Alamagn. Ar wech kentañ eo da Vro-Chall asantif reiñ Republikanek eus Hanternoz Iwerzhon d'ur Stad all. Betek-hen e oa bet nached kement goullenn graet gant ar gouarnamant saoz war zigarez ma oa anv eus *"repuidi bolitikel iwerzhonat"*.

E Pariz emaint c'hoazh. Bez' e c'hellit skrivañ dezho da ziskouez ho kenskoazh dezho. Bez' e c'hellit ivez klenn d'an Aotrou Arpaillange, Ministr ar "justis" e Bro-Chall. Setu amañ o c'hromlechioù :

Arpaillange
Ministere de la justice
13 pl. Vendôme
75014 PARIS
Bro c'hall

Pauline DRUM
Centre Penitentiaire de Fleury Merogis
7 rue des Peupliers
91705 FLEURY MEROGIS

Donagh O'KANE
2385 14 E La Sante
MAISON D'ARRET
42 rue de la Sante
75014 PARIS

Patrick MURRAY
7951 98 Fresnes
MAISON D'ARRET
Allée des Thuayas
94260 FRESNES



Tri iwerzhonad all zo c'hoazh en toull-bac'h e Bro-Chall : James DOHERTY, 7925 11 A, James COLL, 7756 01, Gabriel CLEARY, 7756 00 ; o-zri 7, allée des Thuayas, 94260 FRESNES.

EUSKADI

Breujoù Europa

Da hanter C'houere en deus lezet Txema Montero, kannad Herri Batasuna abaoe tri bloaz, e sez gant Karmelo Landa. N'eo ket evit se avat emañ o vont da baouez da labourat evit H.B. ; stummañ frammatorien H.B. evit ar politikerezh etrevroadel a raio, en ur zerc'hel da zifenn ar brizonidi bolitikel avel alvokad.

Unai Parot

En diskar-amzer-mañ e tle bezañ barnet Unai Parot, a oa bet harzet e Sevilla d'an 2 a viz Ebrel 98 bloavezh toull-bac'h a c'houenn ar prokuror. Emañ Unai e toull-bac'h Alcalá de Henares (tost da Vadrid) e-lec'h ma 'z eo "gredus" ar ward-ed, hervez danevell bloazik Amnesty International, ken ha deus laret ar gonsulez c'hall e Madrid e oa *"prest da grediñ e oa bet jahinet"* pa oa bet ouzh e wêlout e dibenn miz Even.

EUSKADI

Paeroniañ al lu gall

Nached en doa ur c'huzulier broadelour votif evit ma vefe paeroniet ul lestr-brezel gall gant ti-kêr Hendaia, ken ez eus bet disemglev en ti-kêr ha dilezet ar paeroniezh enorus-se.

(Met penaos o doa votet an daou em-saver a zo, evit-doare, e kuzul-kêr Roazon, pa oa bet kaoz da baeroniañ al lestr-brezel *"La Motte-Picquet"* ?)

KATALONIA

Ar Vall d'Aran emren

Ur rannvro emren e Katalonia e vo hiviziken ar Vall d'Aran, an tiriad-se eus Katalonia ar muiañ er gwalarn, (e rannvro Lleida betek-hen) gant 4000 a dud, e-lec'h ma vez komzet ur rannyezh ok, hañval ouzh ar gaskoneg.

Hervez al lezenn embannet d'ar 14 a viz Gouere gant ar stad Spagnol e vo aranez kenofisiel gant ar spagnoleg hag ar c'hatalaneg. An douar nemetañ ma vo ofisiel an okitaneg en Europa e vo ar Vall d'Aran eta.

Gallel el lez-varn

Goullenn a rae ar senedour Henri Goetschy, eus Elzas, digant ministr ar justis (?) lakaat da dalvouz *"ar gwir da vout dishañvel"* evit ma paouezfe Bro-Frañs, evel ma lavare F.Mitterrand en Oriant e 1981, *"da vezañ an diwezhañ bro en Europa o nac'h digant he c'henellennoù ar gwinoù sevenadurel diazez anavezet en emglevioù etrevroadel sinet gant"*.

Hervez respont ministr ar justis (?), e J.O. an 2 a viz Eost, gant ordenañs Villers Cotterets e 1539 hag an deskij-gallel ret er skolioù eo asuret mestroneiezh ar gallel gant an holl goedeodourien. An diaezamant a c'hell sevel a zo *"exceptionnelle et résiduelle"*.

Ur yezh *"résiduelle"* eo ar brezhoneg eta. Ar gallel n'eo ket.

OKITANIA

Savet e oa bet e penn diwezhañ miz Eost "Kevre ar Dilemudi Okitan", ennañ dilennidi broadelourien eus teir lodenn Okitania : al lodenn a zo er Stad C'hall, an traoniennoù a zo e Stad Italia ha Traonienn Aran a zo e Stad Spagn. (Diwar ar gelaouenn okitaneg Mapamonde).

Lennit al liamm

Koumanant bloaz 150 lur

(studierien, soudarded ha tud dilabour : 100 lur)

Skrivañ da : AL LIAMM 16, straed des Fours à Chaux - 35400-St Malo-

Kondaoniñ aloubidigezh Koweit gant Irak ha kemeuridigezh ostajed a ra an UDB.

Nemet sonjal a ra eo kiriek Bro C'hall da vezañ armet Irak.

Goullenn a ra e vefe galvet en-dro ar soudarded kaset gant Bro-Chall da Vor Pers.

DESKADUREZH

Un hanter DEUG brezhoneg e Brest


Abaoe miz mezheven e ouier e vo, e-pad ar bloavezh-skol zo o kregiñ, un DEUG "brezhoneg" e Skol-Veur Breizh-Izel. An DEUG-se, digor d'ar studierien bloavezh kentañ, ne vo ket avat heñvel ouzh an DEUG brezhoneg a zo e Skol-Veur Breizh Uhel e Roazon abaoe warlene, rak ar brezhoneg ne daio d'ober nemet an hanter eus an danvezioù studiel, an hanter all o vont gant ar saozneg, pe ar spagnoleg pe an alamaneg pe c'hoazh ar gallel. Un DEUG "daou benn" e vo eta, evel ar c'h-"CAPES brezhoneg" pe evel an Aotreegezh hanter-vrezhoneg a oa e Skol-Veur Brest un nebeut bloavezhioù zo.

An dra-se eo a oa bet goullennet gant kelennerien Rann Geltiek ar Skol-Veur-se warlene p'o doa gwelst e rae berzh an DEUG brezhoneg e Skol-Veur Breizh-Uhel. Soñj ho peus marteze e oa c'hoarvezet heñvel gant an

Aotreegezh : war-lerc'h ma vije bet gounezet an Aotreegezh vrezhoneg e 1981 a drugarez da stourm studierien ha kelennerien brezhoneg Skol-Veur Breizh Uhel, e oa bet krouet ur bloavezh diwezhatoc'h un Aotreegezh hanter-brezhoneg hanter-saozneg e Skol-Veur Brest war c'houllenn kelennerien ar Rann Geltiek eno. An Aotreegezh hanter-brezhoneg-se ne zedennas ket kalz a studierien ha buan-tre e teuas da vezañ un Aotreegezh vrezhoneg penn-da-benn.

Moarvat e c'hoarvezo heñvel gant an DEUG hanter-brezhoneg. Ha rannout a raio kelennerien Rann Geltiek Brest, zo anavezet-mat evit ar strouv a reont evit yezh o bro, kinnig da studierien Breizh-izel un DEUG e brezhoneg penn-da-benn.

Anna GENNER



Korsika : ur gwir a g-Capes

Deuet eo ar *"Sindacatu Corse di l'Insegnamento"* a-benn da c'houini ur gwir a g-Capes Korsek. Gant sikour ar familhoù skoldi hag ar studierien, goude bolkot ar c'hcapes daoubannek a oa bet kinniget dezho hag aloubidigezh ar Rektori, en deus pleget ar gouarnamant.

Distaget eo bet ar c'horseg diouzh ar

rummad K, rummad ar c'hcapesoù yezhoù rannvroel, e-lec'h ma chom ar brezhoneg e-unan (da c'hortoz ar c'hatalaneg, a-bann bloaz pe zaou ?). Ur statud uheloc'h en deus gounezet ar c'horseg, pezh a ziskouez ez eo kenbar ar yezhoù evit ar stad. Dre stourm an emsav eo bet gounezet kement-se avat. Deomp da c'hortoz hag-ehñ e fell deomp kemend-all.

Capes Alamaneg-Elzaseg : blev !

Goullenn a ra Skol Veur Strassburg (Elzas) e ve krouet ur c'h-Capes alamaneg gant ar meneg *"Yezh ha Sevenadur elzaseg"*. Nached a ra ministr an Deskadurezh C'hall reiñ kement-se avel-just, evel ma nac'h krouiñ ur c'h-Capes katalaneg, hag evel ma nac'h paourvrezhonekaat ar c'h-Capes hanter-vrezhoneg.

Miz GWENGOLO

D'ar Sadorn 22, e lise Pondi, bodadeg veur izili Unvaniezh ar Gelernerien.

Miz HERE

D'ar Sadorn 27 ha d'ar Sul 28, e Douarnenez, 4vet bodadeg veur ar FLAREP (Kevread ar yezhoù-rannvro en deskadurezh-stad), aozet gant an APEEB (Kevradigezh ar familhoù evit klenn ar brezhoneg).

Miz DU

D'ar 15, 16 ha 17 a viz Du 1990 a vo e Strassburg, e Palez Kuzul Europa, ur c'hendiviz etrevroadel anvat *"Gwilioù yezh, gwilioù mab-den"*, kennaezet gant ar C'helc'h elzasat Rene Schikele ha gant Burev Europa evit ar Yezhoù "Nebeut Implijet". Titouroù a c'heller goullenn digant Rene Schikele Kreis, oberlinstrasse 31, 67000 STRASSBURG (pg. 88 36 48 30).

SKINWEL

"Chadenn ar Vro"

A vo skignet, e miz Gwengolo bapred, d'ar Sadorn, eus 1 eur da 2 eur goude kreisteiz.

Keloù ebet eus "An taol lagad" betek-henn. N'ho pet ket aon da skrivañ ha da glemm.

Brezhoneg bemdez ?

E Gouel ar Filmoù Douarnenez en doa lavaret an Aotrou guguenn, Renar FR3 Roazon e vije studiet penaos lakaat un tamm brezhoneg bemdez war ar skinwel... Evit tud Breizh izel hepken, N'ho pet ket aon da gas un tamm lizher dezhañ da larout ho soñj.

GWIRIOU

BRO-C'HALL HA GWIRIOU BUGALE BREIZH



Embannet e oa bet ur "Feur-emplav war Gwirioù ar Vugale" gant ar Broadoù Unanet e miz Du 1989. Bez' e ranke an destenn-se, evel kement testenn heñvel a vez embannet gant Aozadur ar Broadoù Unanet, bezan degemeret gant gouarnamant pep Stad, a-raok bezañ lakeat da dalvezout. E miz Mezheven en doa kinniget ar gouarnamant gall d'an deputeed ha d'ar senedourien votin war ar poent-se eta.

Degemeret e oa bet an destenn etrebroadel gant hon deputeed hag hor senedourien, evel ma oa bet goullennet outo gant ar gouarnamant. Hogen an Itron Edwige Avic, ar Vinistrez he doa komzet dirak ar Vodadenn Vroadel, hag an Itron Helene Dorlhaic, ar sekretourez Stad he doa kaozeet dirak ar Sened, a lavaras e vefe degemeret ar Feur-Emplav gant ar Stad c'hall war-bouez ur poent, ar mellad 30 a embann ne c'heller ket mirout ouzh bugale bihanniveroù kennelel (*), rejlijel pe yezhel ar gwir da gaout ur vuhez sevenadurel dezho o-unan, da greññ en o relijion pe d'ober gant o yezh. N'eus ket ezhomm ur mellad a seurt-se, eme an Itron Avic, rak ar Republik C'hall zo ur vro unvan ha disarannus, e-lec'h n'eus ket a vinorelezhioù ! Ar vrezhonegerien vihan n'eus ket ezhomm e vefe gwarezet o gwirioù sevenadurel, peogwir int Gallaozed evel ar re all...

E-touez an dilennidi ne voe klevet nemet re ar Strollad Komunour Gall o sevel o mouezh da lavaret ne oant ket adu gant difradenn ar gouarnamant. An Actrou Jean Tardito, depute komunour, a lavaras zoken, e anv e strollad :

"Faut-il comprendre que notre pays serait éventuellement prêt à interdire cela (ar gwir da gaout ur vuhez

sevenadurel dezho o-unan, h.a.) à ses enfants ? Va-t-on interdire à un jeune Breton de parler la langue bretonne ou à un jeune Provençal de parler la langue provençale avec leurs parents respectifs ?"

Gourc'hemenoù dezhañ ! Ha mezhañ d'an dilennidi eus Breizh o deus asanet, ur wech ouzhpenn, da gredennoù strizh ar Jakobined c'hall, hep lavaret ger ebet !

Hogen testenn ar feur-emplav Etrebroadel war Gwirioù ar Vugale, evel m'eo bet degemeret gant ar C'hallaoued, a c'hellimp an em harpañ warni evit hor stourm, memestra. Ar mennad 17.d, da skouer, a lavar e le ar skingomz hag ar skinwel d'erc'hel stad eus ezhommoù ar vugale a gomz yezhoù "bihan". Ha disofjet he deus ar Stad C'hall lavaret ne zegemere ket ar mellad-se...

(* "minorités ethniques"

I. KADORED

(Testenn ar Feur-emplav Etrebroadel war Gwirioù ar Vugale a c'heller kaout digant Stourm ar Brezhoneg, 21 straed an Tier-Barn, 56000 GWENED. Lakait ur chekenn 30 lur war anv S.A.B. evit ar frejoù liestennañ ha kas.)

N'on ket bet souezhet tamm ebet gant pennad Anna Kerlagadeg (hag-eh ez eo he foto a zo dindan ? Siwazh, re gozh en evit !). Peadra zo da vezañ nechet gant "Chadenn ar Vro".

Ar wech kentañ, me 'gav din, e oan deuet eus Brest da Roazon evit seurt abadenn, e oa bet ret din kousket e Roazon, evit lavaret teir frazenn d'ar Sadorñ veur. Brestañ, e kuitañ Brest da 1 eur goude kreisteiz, hag e vester en-dro e Brest a-benn 9 eur noz, met bepred evit lavaret teir frazenn. Gwelloc'h an traoù neuze ! Met kouskus-kenañ eo an teir frazenn-se evit FR3 : ar veaj mone-done eus Brest da Roazon, e kentañ klas, mar plij, ha tro-dro 60 lur a vez roet d'an hini a lavar teir frazenn.

Skrivet em boa d'ha tost da vat kement-se da V. Baudu pa oa oc'h ober war-dro Chadenn ar Vro. Peadra zo da vezañ dipitet-bras evit an hini a lavar an teir frazenn-se !

Arabat, evit kement-se, teuler ar fact pe war Baudu pe war Favereau (a zo o teskiñ ar vicher). Evel just, siwazh, e teu

ar reolennoù hag ar gizioù eus Pariz. E galleg ez eus un abadenn seurt-se ivez, lec'h ma komz an dud e-pad teir munutenn, hag e vez troc'h et ar gaos dezho gant sonerien pe kanerien. Setu, ne sellan ken morse ouzhan un abadenn-se, ha ma sellan ouzhan FR3 (goude bezañ enrolllet, rak an eouroù ne zereont ket ouzhan, hag evel-se e hellan ouzhpenn kas kuit an traoù ne blijont ket din), ez eo dre m'emañ e brezhoneg.

Rat e vefe gouzout ivez penaos e oa tremenet an traoù evit an abadenn ez eus kaoz anezhi.

Pemp den a oa bet pedet, ar re ho peus gwelit, hag unan all ne lavarin ket e anv.

Da gentañ-tout, e oa diwezhat Kouilzh Kedez, n'eo ket dre e fact, met pa oa bet harzet e dreññ e Messac gant tud e fulor a-enep an SNCF. Neuze e oa bet ret mont da gerc'hat anezhañ betek Messac gant un oto. E-pad an amzer-se, e oa kroget an traoù, heptañ. Met, just a-raok komañs, ar pempvet den e-noa goullennet an aotre mont da staoat, ha... n'eo ket deuet en-dro ! Soñjit e

penn Favereau pa vanke unan dezhañ ! Neuze o-doa komzet Guyonvarc'h, me ha Jouin. Pa oa erruet Kouilzh Kedez, e oa adkemeret un dam eus an traoù.

Plijadur em bele bet, o komz eus va levr gant Kouilzh Kedez (gant m'e-nefe graet gant brezhoneg e vro, ha nompaz gant unan kozh-Nominoe ! Lennet em-oa e levr e-barzh an treñ o tont da Roazon, ret din annez n'am oa ket komprenet kalz a dra, met sur on ez eus "awen" gant an den, ha ma skriva evit ar re all estregel evitañ e-unan nemetken, e vefe sur plijus-tre da lenn).

Un dra all : n'on ket a-du kennebout evit ma vefe komzet eus levrioù e galleg e-pad an abadenn vrezhonek. Plas a zo evito e-pad an abadennoù e galleg. Neuze, dont a-benn da sevel divizoù etre an dud o deus embannet tra pe dra e brezhoneg, ha reiñ muioch a amzer dezho. Met petra a lavarin Pariz ?

Teatr filmet e-plas telefilmoù ? Tele ar re baour, ha netra ken.

A. AR MERSER

SKINWEL

SAB "BREZHONEG BEMDEZ" EME SAB

Emdroadur an abadennoù brezhonek

Abaoe 1964 e c'heller gwelit abadennoù skinwel brezhonek. Hogen gwall dreut eo chomet o c'hementad a-hed ar bloavezhioù.

E 1980, dek vloaz zo, e vaze skignet 54 mn a vrezhoneg bep sizhun, ar pezh a rafe 7 mn 43 bemdez (komz a reomp eus an amzer skignañ ha n'eo ket eus an amzer produñ). E 1983 e vaze skignet 1 eur 30 a abadennoù brezhonek war FR3 bep sizhun. Seiz vloaz war-lerc'h e vez 1 eur 45 bep sizhun, da lavaret eo 15 mn bemdez (ha c'hoazh ne gontomp ket an traoù dileet d'ar vakañsoù hañv pe d'an "darvoudoù a-bouez" er c'helaouioù).

Ur c'hard eur bep sizhun hon eus gounezet eta e-korf 7 vloaz. Degas a reomp da soñj deoc'h ez eus deuet 3 chadenn c'hallek da Vreizh e-keil-se, ha lod anezho o skignañ 24 eurvezh bemdez.

[Sifroù tennet eus kouskriz D.E.A. Noël LAINE, "Communication et culture : des mass-media à l'édiction quel avenir pour la langue bretonne ?]

Keñveriadenn gant broioù all

Ma keñverier stad ar brezhoneg gant hini yezhoù all hep Stad en Europa, petra a weler ?

E Galisia, e-lec'h ma vez komzet galianeg gant 85% eus an 3 milion a dud, ez eus ur chadenn skinwel, TV Galizia, krouet e 1985, a skign 12 eurvezh bemdez e galianeg. Ouzhpenn-se e vez skignet war-dro 3 eurvezh bemdez gant unan eus an div chadenn Stad, TV1 ha TV2.

Diouzh kresk an abadennoù brezhonek etre 1980 ha 1990 (50 mn e-korf 10 vloaz) e vije ezhomm 124 vloaz a-raok deomp tizhout ive Bro-C'halsia.

Kemeromp ur skouer all, a zo anavezet a-walc'h e Breizh, hini Kembra : war ar chadenn S4C e c'heller gwelit 25 eurvezh a abadennoù kembraek bep sizhun, da lavaret eo 3 eur 30 bemdez, skignet d'an euriou gwellañ.



Budjed an abadennoù brezhonek

Daoust pegen bihan eo lodenn ar brezhoneg war ar skinwel e vez diaes kavout archant evitañ. Setu ar pezh a skriv Noël LAINE en e gounskrid D.E.A. :

"Depuis 1984 le Conseil Régional attribue des subventions importantes pour ces émissions (abadennoù e brezhoneg) : "Vous dire que je me satisfais de la situation vis-à-vis de la langue bretonne, non. Vous dire que ça me fait plaisir d'aller demander au Président du Conseil régional une subvention pour améliorer les choses (...), non, ils s'aperçoivent bien que les promesses n'ont pas été tenues. Est-ce que le rôle d'un service public est d'aller à la quête pour le maintien d'un acquis culturel comme celui de la langue bretonne ? Je dis non mais je suis contraint de le faire".

Le directeur de FR3 Bretagne reconnaissait dans cette interview que sans les aides du Conseil Régional, le breton serait exclu des ondes hertziennes. Etrange tout de même, pourquoi un service public doit-il aller quémander auprès du Conseil Régional ? FR3 bénéficie pourtant de recettes publicitaires et de diverses taxes dont la redevance audiovisuelle. Logique impénétrable. Le conseil n'a cessé depuis 6 ans de verser une subvention variant entre 700 KF et 750 KF".

Ar skinwel ha diskar ar brezhoneg

Anavezet eo an efed bras en deus ar skinwel war implij ar yezhoù hep Stad evel ar brezhoneg. Hervez ma vo roet he flas d'ar yezh war ar skinwel pe ne vo ket e vo kaset war-raok er gevredigezh pe e vo gwasket ha lezet a-gostez. Buanoc'h-buanañ e kil ar brezhoneg er gevredigezh vreizhat abaoe m'eo diazezet, da vat hag e-touez an holl, ar skinwel hag ar skingomz e galleg.

Sellomp ouzh lodenn ar brezhoneg e-touez an abadennoù skinwel degemeret e Breizh digant ar c'hoazh chadenn c'hall : 1 e 45 mn a vrezhoneg bep sizhun e-koaz war-dro 840 eurvezh a c'halleg, da lavaret eo 0,2% !

Ma vefe un eurvezh a vrezhoneg bemdez ne dizhemp ket zoken 1% eus an abadennoù degemeret e Breizh (7840).

An diskoulm

Eñeun eo an diskoulm. Mar fell deomp reiñ an tu d'ar brezhoneg da vevañ e rankimp kaout ur chadenn e brezhoneg penn-da-benn, evel evit ar yezhoù all hep Stad.

Fellout a ra da Stourm ar Brezhoneg eta e vefe savet ur steuñv diouzhtu a-benn krouñ ur chadenn skinwel e brezhoneg. Evit se ez eus ezhomm ur youl bolitikel da gavout an archant rekis ; rat eo ivez stummañ tud ar skinwel diouzh an ezhommoù.

Evel pazenn gentañ, ha da c'hortoz ar chadenn vrezhonek, e rankomp kaout diouzhtu abadennoù brezhonek bemdez.

Brezhoneg bemdez war ar skinwel !

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59 hent Kerdronioù Vihan
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur
Skouzell adalek 130 lur

bremañ

SKINGOMZ

"ROCK" HA BREZHONEG

Akordeoñs nemetken ?

Peogwir emañ o teskiñ brezhoneg e selaouan abadenn vrezhonek ar Sadorn war Radio Arvorig. Nemet n'ouzont ket betek peur e talc'hin d'ober.

Skuizh on aet gant Denez Prijant na oar nemet komz eus akordeoñs ha treujenn-gaol ha kinnig pladennoù eus ar sonerezh a blij dezhañ, hini ar festoù-noz, ha pa vefe gant kanaouennoù gallek. Gwelloc'h e vefe dezhañ mont d'ober un abadenn c'hallek diwar-benn an traoù-se, mar kav selaouerien, ha reiñ d'ar vrezhonegerien ur gwir abadenn diwar-benn buhez an dud e Breizh. Rak ha vuhez n'eo ket hepen gwerzioù kozh ha festoù-noz, bez'eo ivez labour kozh ekonomiezh, beajoù ha studioù, sonerezh modern ha stourm ... Met ne blij an traoù-se da Briant, ha gwazh a se d'ar selaouerien.

Morse ivez ne gomz eus levrioù na kazetennoù brezhonek : peogwir e vefe ret dezhañ o lenn ?

Herve RIOU

A daol-trumm em eus komprenet hivi em eus graet ur fazi divent !

E-pad bloavezhioù em eus klasket seniñ gitar (tredan memestra !) ha kanañ e brezhoneg war ar memes tro. Che ! Nag ul labour ! Ma, evit bezan sklaer, seniñ war ur mod rock, 'ba ur strollad ... rock e oan oc'h ober.

Met pezh ne ouien ket eo e oan floch ur vro "imperialist" benn ar fin.

..Va digarezit, eme ar martolod, ne gomprenan ket.
-Ac'ha, c'ha ! 'Peus ket komprenet mignon ? Eus pelec'h e teu ar rock ?
-Amerika marteze ?
-Gwashoc'h mab ! Eus Stadoù Unanet, ar Vro "imperialist" ha ne blij ket din-me kement-se pezh a zeu eus ar broioù-se.

Setu petra hor boa klevet war gwagennoù Radio Arvorig e Brezhoneg d'ar Sadorn 4 a viz Eost 1990, hag ar gasedig a zo ganin da broiñ pezh a lavaran.

Rock = sonerezh imperialist.

Piv en deus lavaret strizh ?

A greiz kalon,

Gweltaz Adeux,
kaner E.V.



Kenavo Claude Kerfriden

D'an 3 a viz Even eo marvet Claude KERFRIDEN e Roazhon. Taget e oa gant ar c'hriñ-bev abaoe meur a vloavezh ha stourmet en deus kreñv ouz ar c'hliened.

Gantañ eo bet savet tresadennoù ken brav kontadenn P.J.HELIAS (embannet e 1977 e ti Armor-Editeur) : "Penaos e teuas eur Breizhad da vezañ roue bro-Zaoz".

E 1983 en deus embannet ur vandenn-dreset e ti CALLIGRAMMES : "KER IS", hag a adgompenna ar vojenn gant skiant-faltazi en un doara soezhus.

Ouzhpenn-se en doa bet fardet bandennoù-treset all ovel e-barzh ar gelaouenn "Fri Louz" er bloavezhioù 1975, hag a dalvezfe ar boan bezañ strollet en ul levr.

Abaoe ma oa klañv e oa bet ret dezhañ diezel e vicher a gelenner war ar gallek, hag e oa en em roet d'an engraverezh ; diskouezet e oa bet e labour liesseurt e Roazhon hag e Mordelles warlene.

D'ar Gwener 6 a viz Even eo bet kaset e gorf d'an ti ludiñ e Karrez, hervez e volonté, ha lavaret kenavo dezhañ gant e dud kar hag e vignoned.

J.Y.B.



AN HAÑV E BREIZH

Evel just ez eus bet amzer vev e Breizh e-pad an hañv : en abeg da se marteze ez eus bet kement a dud er vro. Met peadra zo da soñjal ez eo deut niverusoc'h c'hoazh BreizhVeuriz, Nederlandiz hag Italianed gant ar bruderezh kaset gant "Kuzul Douristelezh e Breizh". Hag alies ne zeuont ket an dud-se da Veizh evit rouzañ astennet war an draezhenn met evit dizoloñ pinvidigezhioù ar vro : diskouezadegoù, gouelioù, chapelioù, kastili ...



Baz emañ evel just "Kann al Loar" e Landerne, Gouelioù nevez Landreger, gouelioù Roazhon h.a.... Met ret eo laroù, pa vez kaoz eus "Festival", e soñjer diouzhtu e Gouelioù Kerne hag e Gouelioù Etrekeltiek an Oriant.

Kemper : touristed ha tud ar vro mesk-ha-mesk

E Kemper, trade sizhun miz Gouere, Gouelioù Kerne 90 a zo bet dispar : 110 000 a dud o deus kemeret perzh, Kempouezh eo ar budjet ! Met hebiou ar sifroù ez eo ret mont. Er bloaz-mañ e felle d'ar c'hornite ober en-dro ur gouel evit tud ar vro, deut int a-benn mat-kaer eus o c'hlaoustra : kemperiz a zo bet tizhet gant ar gartenn ispisial o doa resevet dre ar post hag a lake an abadennnoù-noz (Stivel, Dan, Spillane, Mervis eta. Eil abeg : gant danvez 90 : "Emgavioù binioù bras Europa" o deus kavet un tam a-zoare : kalite ha plijadur a oa liammet kerkoulz evit an abadennnoù

war ar roll hag evit an abadennnoù e-kichen ("off" e galleg !) : pa vez gwelet ur sardinian o seniñ gant un estonian, pep hini gant binioù e vro, da 3 eur mintin war beg ar Fuji, nag ur Festival ! Notenn vat : an holl abadennnoù a vez kinniget e brezhoneg ! Notenn fall : evel abadenn e brezhoneg war ar roll ne oa nemet konchennoù da 4 eur g.k. (reit deomp en-dro ur pezh-choari da 9 eur noz !). A-benn bloz na c'hwitit ket an emgav gant Mouezhioù Europa !

Dudi ha c'hoant dizoloñ zo peget en dud

E-maez ar gouelioù ez eus bet ur mor a dud ivez en holl virdioù ha diskouezadegoù koulz ar re vras hag ar re vihan, kement war ar "sevenadur" hag ar skiantoù pe an "istor" : tri chantved bloavezh ar feilhañs e Kemper, digoradur "Oceanopolis" e Brest, lenzorioù Kolombia e Daoulas ... Met arabat e vefe disoñjal amañ e vez kavet e Breizh mirdioù bihan a-leizh : hini ar mor e

vefe disoñjal amañ e vez kavet e Breizh mirdioù bihan a-leizh : hini ar mor e Konk-Kerit, ar sonerezh Mekanik e Kambrit, ar Ragistor er Vro-Vigouden, h.a.

Peadra a zo da soñjal neuze ez eer war du an "douristelezh sevenadurel" a oa kaoz diouti abaoe ur pennad, ret e vefe avat kenaozañ gwelloc'h ar bruderezh evit an traoù a vez kinniget gant aozadurioù pe parrezioù bihan evit ma ne vefe ket friket an teñzorioù-se gant an "oifanted" leun a'archant.

Un nebeut sifroù evit un nebeut plasoù

Gouelioù Kerne : 110 000 den
Gouelioù an Oriant : 150 000 den
"Oceanopolis" : 160 000 den
etre fin miz Even hag ar 15 a viz Eost.

Kastell Keryann : + 60 000 den
Mirdi an arzoù-kaer e Kemper,
Expo Feilhañs : + 60 000 den
Park an Arvorig : 230 000 den

SEVENADUR

KOROLLOURIEZH HA BARZHONIEZH



marv tud Anjela

D'ar Gwener 10 a viz Eost, e Pont-an-Abad, ez eus bet un abadenn-dañs gouestlet da vuhez hag oberoù hor barzhez vrudet : Anjela DUVAL.

Aozet e oa gant **TAMM KREIZ** - Skol Dañs Bro Vigoudenn - 41 str Jean Baudry - 28115 AR GELVENEZ, Pg. 98 53 80 10 pe 98 58 17 32 dindan renerzh Frañsoaz CHAKAR-JOLIVET a oa ganti ar roll pennañ : hini Anjela.

War-lerc'h div ganaouenn gant Louise EBREL ez eus bet displeget deomp gant dañsered **TAMM KREIZ** buhez Anjela : da gentañ he bugaleaj e ti he zud e Traon-an-Dour ; amzer he yaouankiz da c'houde gant an darvoud pennis m'eo bet eviti ar garantez he doa maget evit ur martolod dister a-walc'h ha "ne gare ket pezh a garan" ; echiñ a ra an tamm kentañ gant kozhni ha marv he zad hag he mamm a oa ken karek ganti : fromus kenañ an dañs neuze.

En eil tamm eo bet displeget deomp obererezh Anjela : dizoleiñ a ra ar varzhoniezh vrezhonek ; evel ur vuhez nevez eo eviti. Buanoc'h ez a an dañs : kalz tud a zeu d'he darempredin ; emsaverien da gentañ ; met buan a-walc'h e teu da Draon-an-Dour tud a bep seurt o doa gwelet Anjela war ar skinwel

bremañ

Staj brezhoneg en Oaled

War-dro 50 stajad e 4 live.

6 frapad kentelioù bemdez gant 2 gelenner war dro pep live.

Azalek 4e30 e veze kinniget traoù disheñvel d'ar stajadi :

-sport : kanoù pe c'hoazh "patinage" e Brest gant Bertrand LAVIEC, kelenner war ar sportoù.

-kembraeg : 2 live a oa kasat en-dro gant Brian HENSALL ha Kristin PELLE.

-gweladennoù a bep seurt : iliz kozh gant Goulc'han KERVELLA, mirdi ar mor gant Joel MESIEN, saver loened gant Maoris POLIN, saver istr gant A. GONGAT BESCOND, pe c'hoazh Skolig al Louarn, Skol Diwan Gwitameze ...

Tud a zo bet pedet da zont da zeskiñ deomp dañs (Valentine LE PORS hag he mignonezed deus Plougrene) pe da c'hoari domino (gant tud all eus Lanniliz).

Hag evit echiñ un devezh en em gawe tud da goañañ ha da chom ganeomp da veilhañ da c'houde.

gall : ur gwir dourni eo bet e gwirionez bloavezhioù diwezhañ he buhez ; mervel a ra gant ar skuizhder, laouen avat da vezañ labourer ken efedus evit he yezh hag evit he bro.

Mat-tre eo bet an abadenn : ken ar c'horoll, ken ar sonerezh, ken ar barzhonegoù a zo bet kanet pe zispleget e-pad an abadenn. Hor gouic'hemenoù d'an dañsered, d'ar c'hanerezed, hag ivez d'an DIL Ivona MARTIN a anavezet mat Anjela hag he deus allet Frañsoaz CHAKAR-JOLIVET evit sevel an abadenn. C'hoariet e vo adarre er bloaz a zeu da geñver 10vet deiz-ha-bloaz marv Anjela (d'ar 7 a viz Du 1981).

Evit gouzout muioc'h diwar-benn Anjela :

-Niv. 210 (genver-C'hwevrer 1982) AL LIAMM.

-Levr (gallek) Roger LAOUENAN, embannet evit an eil gwech e 1982 ivez gant "Nature et Bretagne" er rummad "Bretons, temoins de leur temps".
-Labour-mestroniezh Annie PLUSKELLEG "Anjela DUVAL, he buhez hag hec'h oberoù" embannet gant HOR YEZH e 1985.

B. KADORED



E-kerz ar staj zo bet mareoù kreñv evel debrñ er maez war bord an Aber, pe an nozvezh diwezhañ p'en deus tud An Oaled pedet brezhonegerien Treglono evit ur pred er maez.

18

SEVENADUR

44vet SKOL-HANV KEAV

Dalc'het eo bet kamp atrekeltiek ar vrezhonegerien e skol Joliot-Curie e Skaer eus ar Sul 15 d'ar Sadorn 28 a viz Gouhere, dindan renerzh Anna Ar Beg ha Gwennal Huon. War-dro 160 a dud a zo deuet, etre an div sizhunvezh, rak an taol-mañ e oa bet lakaet daou maread labour, 6 devezh pep hini. Ar sifir uhelañ a berzhidi abaoe 18 bloaz, Kamp Pont-a-Kroaz a-hervez, ma oa deuet 200 a dud. Rannet e oa ar stajadi etre 6 rummad, hervez o barregezh war ar yezh. Er rummad uhelañ ez eus bet graet kentelioù war an armerzhouriezh hag armerzh Breizh gant Yann TALBOT, war ar yezhadur gant Hervé AR BIHAN, war ar gwenedeg hag ar brezhoneg kentpred (XVII-XVIIIvet kantved) gant Marsial MENARD. 16 kelenner a zo deuet en holl. Labourat e veze diouzh ar beure eus 9e da greisteiz, ha diouzh an abardaez eus 14e 30 da 17e 30. Kentelioù kembraeg a zo bet graet ivez. Goude koan e veze ur veilhaed pe ur gaozeadenn. Klevet hon eus komz er prezegennoù beure eus labour Stumdi gant Hervé KERRAIN, eus ar geriadur hollvrezhonek gant Y.E. LAGADEG, eus an hentou-houarn e Breizh gant R. AN HIR. Diouzh an noz hon eus bet klevet F. MINGAM o komz diwar-benn ar peulvanou e Breizh, gwelet ar film "Nomp ket flaterien", klevet istorioù a bep seurt, desket kanañ ha koroll, beajet dre Europa gant Luc'hvannou, ha diduamantoù all



Anna ar Beg ha Gwen Huon Renerien K.E.A.V.

Evit ar wech kentañ ez omp bet degenmet ez ofisiel gant Ti-kêr Skaer, en doa prietriet ar skol evidomp ; war ar poent-se e ranker lavaret e oa kalz gwelec'h al lojeriz hag ar boued eget warlene e Sant Alan. Pevar "digor-kalon" a zo bet servijet e-pad ar c'hamp ! Pebezh enor evidomp !

Met ar pep pouezusañ a voe ar stumm-ador roet d'ar stajadi. Ar c'hamp talvoudusañ eo e Breizh evit ar stummañ, ken e kaser da Skaer stajadi eus Diwan pe eus Stumdi. Ur seurt skol-veur hañv eo deuet KEAV da vezañ. Koulskoude ne vez ket graet kalz a vrud gant ar c'helouanoù (evit ar wech kentañ e oa kaoz eus KEAV e pajennoù departamant Ouest-France. En ur ober 44 bloaz, n'eo ket fall. A-benn 44 bloaz all e vo tizhet pajenn "Breizh" ?)

Arabat ankounac'haat ivez ar pourmenadennoù war ar maez hag an daou biknik aozet ur wech bep sizhun gant GI PENNEG hag Erwan AR MENN, tro-dro da Skaer. Pegen pljus an aergelc'h hag ar veilhaedeg ...

c'hoazh. D'ar Sadorn 21 e voe dalc'het Devezh ar skrivagnerien er skol. Un ugent bennak a oa deuet, ha tu a voe da gaozeal ganto. Un darvoud "istoriel" evit ar re yaouank. Rak 8 a grennardet etre 14 ha 17 bloaz a oa ivez o teskiñ.

Derc'hel a raimp soñj ivez eus ar Gembreiz deuet d'ar c'hamp (6 hevlene), eus an alaman hag ar japanadez yaouank ma teue brezhonek ken flour gante. Peadra da vagon un tamm avi er Vretoned divrezhonekaet ma ouifant ...

Yann TALBOT

Kreizennoù Dudi

Digoret e vo kreizennoù DUDI a-dalek fin ar miz d'an holl vrezhonegerien yaouank etre 6 ha 12 vloaz.

Klask zo war-lerc'h un animatour(ez) evit DUDI Roazhon. (merc'her 2 eur - 5 eur g.k.) Titour digant Lena Louarn -Pell 99-38-75-83. pe Riwall ar Menn pell. 96-94-44-56.



EMAN KELOAQUENN BREMAN O KLASK un danvez-kelouenner(ez) hanter-amzer (dilabour dibaoe tri miz). Pellgomz da vurev Bremañ **99.38.75.83.**

War greskiñ e vo DUDI. 3 greizenn a vo digoret er bloaz-mañ e ROAZHON, LANNUON ha Sant BRIEG evit ar vrezhonegerien yaouank. Evit klozañ ar bloavezh-skol e oa bet aozet evit bugale st Brieg ha Roazhon, daou zevzh eskemm e dibenn miz Even. Aet e oant da veajiñ en ur gobar war ar stêr Gwillun, ha dizoloet ganto skluzioù ha maezioù bro Roazhon.

19

bremañ

REIZHAD PRIEDELEZH ER VINORELEZH NAXI



(An Naxi-ed - 230 000 a dud a vev e Bro Yunnan e Kreisteiz Sina).

Reizhad euredoù "azhu"

An Naxi-ed a lid "ar gwiskañ bragoù" evit ar baotred diouzh un tu hag ar "gwiskañ brozh" evit ar merc'hed diouzh un tu all, war-dro an oad a 13 bloaz-bugel. A-benn neuze e vez tu da dud a reizh disheñvel kaout darempredoù kevredigezhel. Goude e c'hello an dud yaouank mont e darempred karantez, hag ur paotr a c'hello mont da di e vuiañ-karet evit kinnig ur prof arouezel d'he zud. Pa vo degemeret ar prof e c'hell ar paotr chom e ti an dimezell evito da "arnodiñ" ar vuhez briedel. "Azhu" a dalvez "mignon" ha "karedig". Spis-

verkoù an eured "azhu" eo ez eo ret d'ar briedoù bout a familhoù disheñvel ha bout o chom e ti o mammoù. Ar paotr a dremen an noz e ti ar plac'h ha mont a ra en-dro d'ar gêr diouzh ar mintin. Ar plac'h, avat, ne c'hell tremen an noz e ti ar paotr nemet pa n'en deus ket a vreudeur. Pa emañ pell tiez ar garediged an eil diouzh egile e c'hell ar paotr chom meur a zevvezh e ti e vuiañ karet. Met ret e vo dezhañ mont en-dro d'e di e-pad ur prantad bennak a-raok bout aotreet da dremen nozioù all gant an dimezell. Ur sondandenn er bloavezh 1956 he doa diskouezet 78,6% eus an dud dimezet a oa bet "azhu" a-raok dimeziñ hervez al lezenn. Ar seurt unaniezh-se a c'hell bout hollbad pe berrbad : ur bloavezh, ur mizvezh, pe ur c'houblad nozvezhioù.

Aotreet eo pep hini da gaout meur a garedig ha tremen nozvezhioù gant pep hini anezhe. Ar memes sondadenn a ziskouez o doa an dud bep a 6 "azhu" (keidenn diwar 462 den).

Evit ar goulenn-dimeziñ, e c'hell an dud yaouank eskemm gourizoù, tulbanoù, euredennoù. Pe neuze e vez lakaet ur bazhvelen e-karg da c'houlenn asant ar plac'h. An doare 'zo tennañ un dra bennak eus brageriz ar plac'h karet dirak an holl : ma vinc'hoarzh ar plac'h hep lavaret grik, neuze e vint "azhu"-ed. Ur wech unaniet e chom an daou zanvez-pried dizalc'h an eil diouzh egile evit o argantoù. Hogen, pa ya donoc'h al liammoù etre an "azhu"-ed -gant bugale dreist-holl- e labour ar paotr e parkoù e familh-ger evit bout degemeret tamm-ha-tamm. N'eo nemet pa asant an "azhu"-ed e vez degemeret gant he zud. Pa ne vez ket a vaouez deuet d'he ment e ti ar paotr e ya ar plac'h da vevañ en e di. Hervez o oad e ya an dud liesozhac'h (pe liescoreg) war an unwregiezh.

Benveli

Familhoù linennvammek a vez peurliesañ er bobl Naxi. En ur seurt familh n'eus nemet ar maouezed o deus gwir a hêrezh. Pa ne vez ket ur bennhêrezh, vez adverb'het ur plac'h a-ziavaez ar familh. Ouzhpenn-se e chom ar maouezed deuet d'o ment e ti o mammoù.

Bugale ar vamm "azhu" a ra "mamm" eus c'hoarezed o mamm. War-lerc'h e oa aio ar vugale gant o eontred (breudeur, vamm, anat deoc'h !). Er familhoù-se ne vez ket a dad. Koulskoude, pa vez savet un tiegezh gant daou gen-"azhu" e vez lidet liamm ar gwad etre an tad hag ar vugale gant "Anaoudegezh ar vugale".

Ar vaouez koshañ pe ampartañ a vez mestrez en ti. Ral a wech e vez ur paotr. Mestrez an ti n'he deus ket a zrestwir heverk. Ne c'hell ket ober traoù en un doare amreol. Glad an tiegezh zo d'an holl. En ti -en-dro d'an oaled- e vez azezet ar maouezed war an tu dehou, an hini priekañ. Pep "azhu"-ez he deus ur gambr en he zi (war an tu dehou atav). Met ar baotred n'o deus kambroù ebet en o ziez-i dre ma tremenont o nozvezhioù e ti ar merc'hed. Pa ne deont ket da di o c'harediged e kouskont e kambroù ar baotred kozh (ar re a zo erruet da oad a unwregiezh).

Hervez al lezenn war an dimeziñ ha Bonreizh Republik Sina Boblel e c'hell an holl bobloù mirout pe kemmañ o boazioù. Neuze eo bet kinniget gant ar gouarnamant poblel d'an Naxi-ed daremprediñ an unwregiezh. Degemeret mat eo bet ar c'hinnig-se -hervez keleier zo.

Thorel